

(f° 244)<sup>(1)</sup>

## Andreo ar Bris.

Sillaouit ag e kleffot, hag he kleffot kana  
Eur vers a zo kompozet a neve er bloa man.

Zo gred d andreo ar Bris deus ar pares Pluzelamb  
Zo deud da Sant Jan evid kaout an absolven.

Kris e vije ar galon a kris ma na voelje  
Bars e ~~forchet~~<sup>veret</sup> an de an eb a vije

E vellet ar isod glass ag an douer o glebia  
Gant Daellou Dreo ar Bris var an douer o skuilla.

Kris e vije ar galon a kris ma na voelche  
Bars er forchet Sant Jan an de an eb a vije.

E vellet andreo ar bris vond var penou e gaoulin  
Bars er forchet Sant Jan dirag an imaj divin.

En an' Doue beleien roit tu din an absolven  
Ken du e va ine paour evel ma zeo va zoutanen

En an Doue beleien roit tu din soulajamant  
Ken du e va ine paour evel e zeo va forpant.

Kure a c'heroullas a person ar venec'hi  
Ar vikel a Lanneur savanta tri zo heni.

En an' Doue, beleien roit tu din an absolven  
Me ielo var ar groas da Kovez brema soudan.

Kure<sup>(2)</sup> a c'heroullaz vez bemdez er gador  
E explika an taollenou

(1). - Dans le ms. Penguern, il y a 2 feuillets portant le chiffre 244.

(2). - A partir d'ici, il n'y a pas de séparation marquée de strophes.

390

A Kresk hoas va zourmat[er]jou.

Nan deo ket va laeronsi, ken neubeut va uzulierez  
 Nag a zo dime koz da veza er bed man diez.  
 Mez allas siwas din o c'heuil gwal gompagnunez.

(f° 245)

Adieu otrou Sent Jan da Rom me a renk monet  
 M'ar deuan biten dar ger me a deuis c'hoas d'ho koellet.

—  
 )

Janneton Puill. 16, Juin 1851.